

# Digreizennañ Japan

**Ar framm politikel ha melestradurel japanat, savet diwar ar skouer c'hall, zo o vont da greskiñ pouez e rannvroioù. Pal an adreizhadur bet roet lañs dezhañ e 2003, zo kreskiñ emrenerezh ar strollegezhioù lec'hel e-keñver arc'hant. Ha broudañ a ra ar metoù ekonomikel da vont war an tu-se.**

**e** miz C'hwevrer warlene, en deus kinniget ar C'huzul Enklask war ar Sistem gouarn lec'hel, un aozadur kuzuliañ ar gouarnamant, ur rentañ-kont oc'h aliañ krouidigezh rannvroioù gant galloudoù kreñvoc'h. Anvet "Sistem Rannvroel Doshusei", e kinnig ar raktres sevel rannvroioù nevez emren, en ur gendeuziñ ar prefetioù zo bremañ (tremen eus 47 "prefeti" da 7 pe 9 rannvro), hag en ur zigreizennañ galloudoù ar ministrerezhioù kreiz.

## SEVEL RANVROIOÙ KREÑV

Ar prefetioù, par da guzuloù-departamant ar Stall c'hall, a zo lakaet a-gostez gant kresk ar galloudoù lec'hel, dre m'eo techet ar strollegezhioù da unaniñ. E 2006, niver ofisiel kumunioù Japan zo aet dindan an niver a 2 000 (pa'z eus tost 37 000 e Frañs).

Daoust da raktres Doshusei bezañ gwelet mat gant an daou strollad politikel pouezusañ (ar Strollad Frankizour Demokratel, e penn ar vro, ha Strollad Demokratel Japan, an tu-enep), e stourm kargidi ar

ministrerezhioù a-enep. Ar re-mañ a c'houlenn kentoc'h strewiñ lec'hioù diviz ar velestradurezh kreiz er rannvroioù.

## SKOAZELL AR METOÙ ARMERZHEL

Daoust d'an diaesterioù e seblant an oberoù mont kentoc'h a-du gant ar mennozh rannvroelour. Kenlabourioù zo bet boulc'het etre ar prefetioù, hag un taol-arnod evit an Doshusei zo raktreset war tachenn Hokkaido. Enskrivet en deus ar c'hentañ ministr, Shinzo Abe, an digreizennañ etouez ar palioù pennañ. *"A-benn tennañ gounid eus startijenn, furnez hag ijin ar rannvroioù, eo a-bouez-kenañ diorren ur framm a rofe an tu d'ar rannvroioù da ginnig mennozhioù ha lakaat anezho e pleustr, dre m'eo ar rannvroioù a anavez ar gwellañ ezhommoù o foblañs"* emezañ.

Skoazellet eo raktres Doshusei gant ar metoù ekonomikel evit merañ hag aozañ gwelloc'h an tiriadoù. Emvod-meur renerien embregerezhioù Kansai [unan eus

lodennoù pinividikañ Japan, gant 24 milion a annezidi, enni kêrioù Kyoto, Osaka, Kobe, Nara] a oa bet e miz C'hwevrer. Un disklêriadur a-stroll zo bet savet eno hag a c'halv da zigreizenniñ ar galloudoù lec'hiet holl e Tokyo evit krouiñ rannvroioù galloudus. C'hoant o deus ar metoù ekonomikel en em vodfe c'hwec'h prefeti Kansai, a-benn stummañ tamm-ha-tamm un doare Stad rannvroel.

## DAREMPREDOÙ GANT FRAÑS

E 2008 e lido ar Stad c'hall 150 vloaz he darempredoù diplomatek gant Japan. Kannad Frañs e Japan, Gildas Le Lidec, zo e soñj implijout an digarez-se evit lakaat *"ar gaoz war an digreizennañ hag an eskemmoù etre strollegezhioù lec'hel an div vro"*. Prezidant a-enor kevredigezh "Bretoned Japan" eo eñ, hag e kemero perzh an aozadur en degouezhioù a-drasur.

**Stéphane Péan**  
Prezidant Bretoned Japan

Evit gouzout hiroc'h :  
<http://bretonsdujapon.wordpress.com>

